

FANCH ar POTR KRENY

Allegretto.



Fanch ar paotr krenv hag e vi - gnon, Oa 'tont d'ar



gêr euz ar par - don, Tra la la, la la la la



la, la - lam tra la la, la - la, la - lam tra.

Fanch ar pôtr krenv hag e vignon,
Oa tont d'ar gêr eus ar pardon.

DISEAN

*Tra la la, la la la la la,
lalam tra la la, lalam tra.*

Digouezet ganto tri aotrou
Bet o vale war ar meziou.

Ar re-ma zouge leviten,
Tok kern-uhel war gern o fenn;

Chupen lost-pik ha bragou berr,
Goest d'ober mez d'ar c'hemener;

O moustachou a oa sirêt,
Frizet, fronsset ha pomponet;

Hag en o dourn pell a vaz skany
Gasent endro en eur ganan.

Ha pa weljont an daou bôtr mat,
C'h en em lakejont d'o goapat:

« Les pommes de terre pour les cochons,
Les épluchures pour les Bretons ! »

« Petra deus c'hoant, eme Fanch kre,
Da baka 'n tri lakepot ze ? »

Hag hen mont d'ezo goustadik
Ha tapat krog en o lost pik;

Gant eun taol dourn war greiz e gein,
E strink unan war eur bern mein;

Gant eun taol dourn diwar e fri,
E strink eun all etouez ar pri;

Gant eun taol troad diwar e... ler,
E strink eun all ebarz ar ster.

« Me zesko d'eo'h, eme Fanch krenv,
Dont d'ober goap ac'hanon-me. »

Ha neuze Fanch o vont d'ar gêr,
O kana son ar pilhaouaer !

LAQUIK.